

CHANSON NEVEZ

Var sujet ann everezet.

Breman pa ~~non~~ dizourci, ha-caout eun tam amzer,
Eman echuet ann eost, ha laquet er sollier,
Eman deut'barz ma speret da gompozi eur son,
War sujet ar graguez ha demeuz ar c'hanton.

Ewar sujet ar graguez, hac ar merc'het yaouang,
Pere a zo accoutumet da ewa gwain-ardant,
Da ewa cafe ha gwain-gwen, ha fassadou gwain-ru,
Odivi, cognac, ha liqueur, hac ive cafe du.

Mez eur wreg accoutumet da ewa odivi,
Obliget a vo he goaz da zivoal deuz ~~outi~~,
Da divoal ~~ont~~ alc'houez ar prez, pehini man an arc'hant
Ewit empech anezi da gaout, pa'no c'hoant.

Mez eur wreg en deuz adrez hac ha rayou troyou,
Ha ray eun tol laguet d'ar goaz, ha netra na vouiou,
En peb mare deuz ar zun ~~ha~~ tigouez ar miliner;
Dre eun devez mad ~~ha~~ doc'h deut, ne man quet Yan er guer.

Neuze a pignont'barz er gamp, da gargan eur sabat,
Mar plich ganec'h miliner en casse din d'ar marhat,
Mez mo avertis miliner ~~ha~~ rog ha hefet deuz ma zi,
Da non pas laret guir ha leet ha ewo odivi.

Breman e vo cavet an tu da gaout eun tam arc'hant
Ha pa vo cavet ar gomer evezzo gwain-ardant,
De bonjour deoc'h ma honmer pel zo meuz quet ho coelet,
Demp da glasq pep a vanac'h da dori hon zec'het.

En eur gontan ho doare ~~ex~~ont dan hostiliri;
Petra'momp ma honmer, coulz ~~ha~~ dimp caout odivi,
Hema'digasso grouez d'omp ha nerz enn hon izili,
Me na gavan quet gwuel boesson ewit an odivi.

Mez dre forc d'ann ewan et teuont da vewi,
Ha commançont pilat ho bec, ha da zonnet hardi,
Neuze teui stang-ha-stang an demi quart enn dro,
Digass eta hostis, nequet arc'hant ~~ha~~ vanquo.

Deus quement den ~~ewo~~ en ty ho devont consequans,
Mez confusion en devo ann dud enn ho fresanc,
Mez laret dreont enn trezo, pa' do guelet ho er,
A setu aze merc'het, hac eman leun ho soufer.

Mez pa vent er leun ~~ha~~-voalc'h ~~ha~~ teuont war ar ru,
Mez ne valeont quet plen, branla reont dan daou du,
Unan a lar, quenavo, poent ~~ha~~ dimp mont dar guer
Mez ~~ha~~-ben ~~ha~~ lavar me meuz ma foar d'ober.

Me ~~ha~~ meuz hoaz da gaout zaon, roussin ha holer,
Hac ar butun a zo manquet bars ma zabatieren,
Antren evelse'barz enn ty, da glasq zaon ha roussin,
Fouillan ~~ha~~ ra he godel, mez arc'hant neuz quet quin.

Mez eur vaouez hardi, pihini deuz quet pridiri,
Ha pa ve hachu he arc'hant ~~ha~~ c'houlen ~~ha~~ en credi;

- Mez merc'het ar warc'hadourez dibot, ne wen ambas,
Hac a respontas ractal dezi ebars'ne faç.
- C'houi heuz foetet ho'arc'hant'barz ann hostiliri,
- Ha breman ho peuz ar êr da houlenn traou enn credi :
- Dont era er mæz deuz ann ty, gant eun êr coleret,
Ann ini na ne quet hardi a vo ganti spontet.
- Ober he rei tro ar foar, hep mez, evel ze,
Couscoude he reng caout harp'barz ma allo bale,
- ^{hap} hep nep confusion he-bet ha rei tro ann dachen,
^{hap} Mez enn devo hi zud ho welet eur sort strouillen,
- Abarz ma vëzo fin d'ann de, na guemer na penn na troad,
- Rac ha benn hi has d'ar gær, vo ret caout eur marc'h mad ;
Ha pa fell dezi parlant ema deut a-bill bras,
Passeit ar gallec hac ar latin, na war quet davantach.
- Brud e we hoas deuz ar merc'het hac he ha d'ann ewach douç,
^{hap} - Ha ew'wealc'h betec mont mew, mez ne reont quet a drouç,
Arreze da viana zo agreaploc'h da welet,
Rei a reont da gredi ha we fen scœurezet.
- Ar merc'het yaouanq memeuz tra ebarz ann hostiliri,
Gwuerennou gante'barz'no dorn ha leun ha odivi,
Me ha meuz annoudeguez war buez ar merc'het,
Kar bet hon bet, awechou, gante ho lipet.
- Monet e ran da zisclerian ebarz enn abrege,
Darn deuz ar marvaillon, zo c'hoarveet enn Guene,
Me am boa choazet da vestrez eur plac'h capabl meurbet,
- A ouar poquet da lost ann tas pa ve ganti carzet.
- Eun devez he-barz ar foar me hem boa hi rancontret,
He bars en hostiliri me am boa hi saludet.
Salud, bonjour, plac'h yaouanq tensor ma amitie,
Contantamant ma speret, objet ma harante.
- Ha doc'h ive den yaouanq, me ho salud ive,
Deut da guemer ho lod ar foar, mar ho po polonte,
- Quemerit eur bannac'h liqueur, pe eur bannac'h la goutte.
Quemerit demeuz ar sort eo ar guellan d'ho cout,
- Ha-boë eur pennat amzer hanaveent he zantimant,
Me laras dezi, ar Gwain-ardant zo eun dra excellent,
- Ar bannac'h quantan ha ewas ha rez diontan min fall,
Mez hoant he devoa a-dare da gaout eun all.
- Ha me ho houlenn ive peb ha vannac'h d'am zro,
Me na maquet risq ebet, car ma mestrez ha baeo ;
- Ma mestrez ha blich d'hin, ha dreist ann holl verc'het,
Biquen enn he hompagnuez me nam bezo schet.
- Evet a sort ha garfoc'h emezi ma servicher,
Me fens e renko em c'hondui d'ar guer ;
Allaz neuze he teuis da zonzal em memor, em speret,
Ha cetu ama eun den hac a zo goal dapet.
- Nonobstant da guement ze partial a vo ret,
Mez ma na né quet wit querzet, hi douguen ne rin quet,
Mez pa voamp deut barz enn awel, hac avancet barz enn hent,
- Pa zispeguen diouti he coeze war ann dachen.

-Ar parapluie a zo collet, hac hi zavancher zo a scleg,
-Hac hi houef ha so chomet ha damo hed ann dreiz,
-Cetu clanw braz ar plac'h paour, na guemer na troad, na penn
-Ha me zo nehet bras gant ma mestrez strouillenn.

Ya clanw bras eo ma mestrez, nequet quin ewit querzet,
Ret ~~me~~ ~~di~~ hi lezal war ar'n hent, ha hi laquaat da gousquet.
Neuze ~~me~~ ~~teuz~~ d'ar guer hac hi lezas enno,
Pa hi devo cousquet awalc'h, marteze hi difuno.

Guelloc'h we d'ar sort merc'het enn plac ho farapluiou,
-Caout kipi goloet pa hefet d'ar foariou,
Ha neuze d'ha vianna, ma ne ventuet wit querzet,
~~He~~ vefent tolet ~~he~~ barz hac ~~ha~~ vefent chareet.

d'Ho hass ~~he~~ vefe proproc'h, car ne vefent quet goelet,
Ha quit ~~he~~ vefe ho dillat da vezan habimet,
-Ha comotoc'h eo ive d'ar re've deuz ho ren,
-Car' pignat ebars ar har n'euz quet quement a boen.

-Ho pedi ha ran merc'het dre ma'zon d'och mignon,
-Da vezan moderet pa ewet boesson ;
Car enn eur ewan re, a offancer Doue,
Distrujan a ret ho corf, ha lahan bo-hine.

-Evidon me d'ho quelen me zo ive banbocher.
Demeus ha barez Gourin, hac ~~he~~ chom er *Kerquicher*,
Me a zo eur paouvr qez den, gant ann ewag dibochet,
-Mez ret ew d'hin lezel ma renq er blaman gant ar merc'het.

-Hac eur vicher fall ew ive evit destum madou,
Ret ~~he~~ din mont er blaman da varc'hadour coëffou,
-Entre ~~har~~ pez ha vo uzet hac ar pez a vo roguet,
-Mar-teze ha deui, ha ben, da honnit ma zam boet.



CHANSON

COMPOSET A NEVEZ

ETRE AN DEN INTERESSET

HAC AN DEN FENEANT.

Var eun ton nevez.

-Me fell din implija amzer da gomposi un disput
Hac a rai divertissamant etoues un nombr bras a dut,
Var sujet daou zen er bed man hac a vev en nehamant,
-Unan a zo interesset hac un all a zo feneant.

-An hini zo stag e galon eus ar madou temporel,
Er moment ma sonch bianna e rer dezan o lezel,
Ha pa vel e vern o cresqi e zeo contant nos ha de,
Ha divempra e voasiet evit lacat c'hoas varneze.

Ar feneant ne c'houlen qen nemet ober cherio mad,
Beza distrouill en e labour hac a gorf hac a dillat ;
Mar bez gret dezan labourat a enep de zantimant,
An deiz varlerc'h e chommo er guer da ober e feneant

Petra c'heuz da soureial demeuz va oll demarchou,
Me ne don qet santimantet da vezan mestr da vadou ;
Va zad ha va mam aroc din n'o devoa qet destumet,
Me fell din ober evelte pad ma vin var ar bed.

Gouel' ve dit senti ouzin ha chang cren a zantimant,
Hac e pe un tam peadra hac un nebeut a arc'hant
E ves estimei er c'hontre ha contet eul loden vad.
Ha da vugale var da lerc'h a gaffe un dra bennac.

Ma senten eus da avison, e rafen un tieguez mad,
Bepret e talc'hin em memor trein va mam ha trein va zad,
A zo bet pell bras assambles, ac a zo et gant Doue,
Ha ni yel var o lerc'h pa n'omp et aroc deze.

Gouel' ve laquat eur beden gant ar re zo decedet,
Evit sellet en o etat entre ma voant var ar bed ;
Me oar ervad pa veomp galvet e reomp apparissa,
Mes laquet ousp da labourat betec hon heur diveza.

Goude da boan ha da fatig o testum eur bern madou,
E vo an oll o clasq ar facon da ober dit goal gollou ;
Me vo exant a guementze pa na'mo qet dastumet,
Hac e teufen da brocedi n'em bezo goal goll ebet.

Ma queres ivanti proces pa ne heuz qet a voyen
E yel da gorf da amanti en eur plaç a binigen ;
Me, en eur alumni goulou, en em bario bepret
Gant va arc'hant ha va danvez, ha te a vo prisonniet.

Pa vin digen ha disourci em plijadur o repos,
E vi o clasq saout pe guezec a erruo d'an anter-nos,
En eur goler an horrupla euz da vreg ha tud da di,
Couls e guelet eur serpent en o mesq eguet pa vi.

Pa vin eus va zol o coania ; er penn huela placet,
E po bara zec'h paillec ha banac'hou dour bervet,
Ur plajat qic dirazon, d'am zud o tistribui,
Ha va daoulagad o sellet el lec'h ma plijo din.

Caer c'heuz clasq da excusou, en douar e-ma da blaç,
Goude da boan pa vi maro cete ama da bartac'h,
P'evan blanquen, eur c'hos rochet ar falla vo en ti,
Eur gos lincel ha hi dresset a yelo da-lieni.

Pa barlantes gant ar rison n'en din qet a enep dit
Me voar ervat n'am bo quen partach digant va zud da vont quit,
An hini en deus dastumet pevar, pem cant scoet leve,
N'en deuz qen evit heritach pa guitai aneze.

Finissomp hor c'homplimanchon, sonjomp e rancomp mervel,
Ha tachomp d'en em prepari abars ma deuser d'hon guervel.
Goulenomp pardon eus Doue hac eus hor mam ar Werc'hes,
Ha goude ar fin eus hor buez, mont oll er barados.